

AVE MARIA!



PELERINACH

ESCOPTI KEMPER HA LEON

E CHAPEL ITROUN-VARIA LOURD

Ar 27 a vis Eost 1877



BREST

MOULLET E TI J. B. LEFOURNIER HENA, RU VRAZ, 86.

—
1877

AVE MARIA!



PELERINACH

ESCOPTI KEMPER HA LEON

E CHAPEL ITROUN-VARIA LOURD

Ar 27 a vis Eost 1877



BREST

MOULLET E TI J. B. LEFOURNIER HENA, RU VRAZ, 86.

—
1877

Diocèse de
Quimper & Léon
Escopth Kerper ha Leon

Document numérisé en 2015

AVE MARIA!

PELERINACH

ESCOPTI KEMPER HA LEON

E CHAPEL ITROUN - VARIA LOURD

Ar 27 a vis Eost 1877

Ar pelerinach a vezo renet gant an Aoutrou Le Vicomte de la Houssaye, chalouni eus a gathedral Kemper, missioner apostolik, aotreet gant an Aoutrou'n Escop a Gemper. Ar belerinet oll a vezo rentet er *gariou* ma tleont kemeret ennho an hent houarn eun anter heur araog ma tiblago. Hervez ar-pez a zo bet lavaret, heur an hent houarn a zo eun anter heur araok heur hor bro. Kemeret a raio ar belerinet ho flago hervez ar pez zo merket var ho billejou.

Ouspenn an Aoutrou Le Vicomte, caout a raio c'hoas ar belerinet, Autrounes all d'ho henchâ. Evit ho anaout, n'ho devezo nemet sellet ous ho bruchet : dougen a raint var ho feultrin, eur vetalen gant eur ruban eus ar memes liou gant ar billejou hervez ar c'hlass. Outho e tle an oll

belerinet senti var ar ger : diganto e tleont goulén sclerijen : joa e vezo gantho sclerijenna pep hini.

Dre bep dec, unan a vezo carget da lavaret ar pèdennoù, ha da antoni ar c'hanticou. Mar bez etouez an dec eur beleg bennac, d'ezhan e vezo roet dre vir ar breferanc var ar re all.

Ar belerinet a daolo evès mad da goll ho billejou. Ma teuffent, Doue ra viro, d'ho c'holl en hent, pe da joum ho-unan varlerc'h an hent houarn, e renkint paea diou vech evit unan. Guelloc'h eo eta beza diou pe deir vunuten o c'hortoz, eget beza unan varlerc'h.

Difenn, ha difenn crenn a zo da gana ebars er gariou.

Ar belerinet ne dleont cass gant ho, nemet ar pep necesserra, ar peza c'hellont da zougen gant ho. Mad e ve d'an amezeien, d'ar gerent, d'ar mignounet en em glevet evit-se.

Cavet e vezo evit guir peadra da zibri ha da eva en diabars ar gariou ; mès coust a ra. Guelloc'h eo eta d'ar belerinet cass gantho peadra evit an hent. Diouall da ancounac'haat e tistroer d'ar gear da zeziou vijil.

Le pèlerinage sera présidé par M. le Vicomte de la Houssaye, missionnaire apostolique, agréé par Mgr l'évêque de Quimper.

Les pèlerins devront se trouver à la gare une demi-heure avant le départ du train. Ils se placeront dans les compartiments désignés sur leurs billets.

Pendant toute la durée du pèlerinage, les commissaires leur donneront tous les renseignements désirables, et ils voudront bien se conformer à leurs avis. Dans chaque compartiment, s'il n'y a déjà un commissaire, une personne de bonne volonté voudra bien en faire les fonctions pour la récitation des prières, la transmission des avis et le chant des cantiques. Là où il se trouvera un ecclésiastique, ce soin lui appartiendra de préférence :

1° Les pèlerins sont instamment priés de ne pas chanter dans les gares ;

2° De conserver avec soin leurs billets de chemin de fer pendant le voyage. S'ils les perdaient, ou, si à un temps d'arrêt, ils manquaient le train, ils seraient obligés de payer deux fois ;

3° D'emporter le moins de bagages possible ; ils doivent être pris à la main ;

4° Utile de porter avec soi des vivres pour la durée du voyage, et de songer que le retour s'effectuera un jour maigre.

Cetu aman an hent dre behini e kerzo an hent houarn evit mont da Lourd, ha darn euz ar pèdennoù a vezo lavaret pe ganet e doug ar veach :

BREST, e tiblao da 7 heur (1).

Ar Memorare.

KERHUON, e tiblao da 7 h. 15.

An De profundis.

LANDERNE, e tiblao da 7 h. 35.

Cantik ar Folgoat.

LANDIVISIAU, e tiblao da 7 h. 59.

Iste Confessor.

SANT-THÉOGONNEC, e tiblao da 8 h. 24.

O Caloun Sacr.

PLEYBER-CHRIST, e tiblao da 8 h. 35.

(1) Da lavaret eo 6 heur 1/2, hag ar memes tra evit ar gariou-all.

MONTROULEZ, e tiblao da 8 h. 56.
An Ave Mari stella, en honor da Itroun-Varia-ar-Vur.

PLOUIGNEAU (ar gear diveza euz an departamant) e tiblao da 9 h. 14.

Deus sanctorum meritis.

PLOUARET-LANNION, e tiblao da 9 h. 53.

Ar Brevier, evit ar veleien.

GUENGAMP, e tiblao da 10 h. 37.
Ar Magnificat, en honor da Itroun-Varia-a-Vir-Sicour.

SANT-BRIEC, e tiblao da 11 h. 22.

Cantik santes Anna.

LAMBALL. — *Ar Brevier*, evit ar veleien.

ROAZON, e tiblao da 2 h. 40.

Iste Confessor.

VITRE. — *Ar c'hantik Ho pet truez.*

LAVAL. — *Ar Chapeled kenta euz ar Rozera.*

AR MANS, e tiblao da 8 heur.

Er Mans, e vezo chenchet wagoniou. Re nevez a vezo o c'hortos ar belerinet. Renket e vezint gant ar memes urz hag ar re-all. Pep hini eta en em lakaio eno evel m'az oa renket diarog. — Er Mans, *ar pedennou diouz an noz*, *Litanioù ar Ver-c'hez Vari* a vezo canet. Goude ar pedennou ar belerinet a zo pedet da rei peoc'h, pe da viana cao-zeal goustadig, evit ma c'hellou ho c'hompagnunez en em rei da gousket.

TOURS : Arru : 10 h. 50. — Diblaç : 10 h. 58.

PORTIERS : Arru : 1 h. 14 goude anter noz. — Diblaç : 1 h. 24.

ANGOULÊME : Arru : 4 h. — Diblaç : 4 h. 40.
Ar pedennou diouz ar mintin.

BOURDEL : Arru : 9 h. 10. — Diblaç : 9 h. 45.
Ni ho salud, stereden vor.

MORCENX. — *Ar Sub tuum præsidium.* Ha 3 guech
Regina sine labe concepta.

MONT-DE-MARSAN. — *Ar chapeled a geuz.*

TARBES : Arru : 5 h. 45. — Diblaç : 6 h. 15.
Ar chapeled a c'hloar.

LOURD : Arru : 7 heures. — *Cantik Itroun-Varia Lourd.*

Cavet e vezo e Lourd lojeis aoualac'h evit ar belerinet; pep hini a raio dious he eazamant. Lavaret e vezo e doug an hent da bed heur e vezo an exercicou e Lourd epad an dervechou a dre-mener eno. Peurvuia ar veleien a vez ho pardouna e Lourd, a receo ar c'halloud da goves. Caout a raio eta ar Vretouned beleien eus ho bro evit ho c'hoves e Lourd.

Joa e ve gulet meur ha barres o cass gantho, pe groas pe baniel evit ho dougen er procession a vezo great.

An oll groaziou hag an oll banielou a vezo douget e Lourd, a recevo eno, araog dont kuit, eur venediction particulier. Eun honor eta e vezo evit ar parrezioù, diskuez divezatoc'h ar c'hroazioù, ar banielou-ze santelat c'hoas dre ar vennos-ze recevet e chapel Itroun-Varia Lourd.

Ar c'hroazioù-ze hag ar banielou a vezo cavet plaç dezho en eul leac'h disparti dious ar belerinet.

Cetu aman ar renk a vezo dalc'het er procession :

1° Ar groas ;

2° An oll belerinet var diou rankat. (Mad e ve d'ar C'hallaoued en em voda etrezho, hag ar Vre-touned er memes tra.) Ar merc'hed a vezo er penn araog, hag ar goazed goude;

3° Ar veleien.

Nous prions MM. les Ecclésiastiques de se munir d'amicts et de purificatoires. Pour la procession, il serait à désirer qu'ils fussent en habit de chœur; mais ils sont prévenus qu'ils n'en trouveront pas à Lourdes. Ces MM. se feront un plaisir de rendre aux pèlerins les divers services qui leur seraient demandés.

L'arrêt à Pau ne sera que de quelques minutes. Si quelque pèlerin désirait s'arrêter à Pau, une heure ou deux, il faudrait prendre, à Lourdes, un train différent de celui du pèlerinage. On a demandé à la Compagnie du Midi de vouloir bien autoriser les pèlerins bretons à s'adjoindre de nouveau, à la gare de Pau, au train du pèlerinage. Dans ce cas, le parcours de Lourdes à Pau serait aux frais des pèlerins.

Distro eus a Lourd d'an 31 a vis Eost da 11 h. 30 dious ar mintin

LOURD : 11 h. 30.

Cantic Itroun-Varia Lourd.

PAU. — *Ni ho salud, Stereden vor.*

MORCENX : Arru : 4 h. 20. — Diblaç : 4 h. 50.

Ar Chapeled a joa.

BOURDEL : Arru : 8 h. — Diblaç : 8 h. 45.

Ar pedennou dious an nos. Goude ar pedennou, evel evit mont.

ANGOULÊM : Arru : Anter nos 8 m. — Diblaç : Anter nos 18 m.

POITIERS : Arru : 3 h. 3. — Diblaç : 3 h. 15.

TOURS : Arru : 5 h. 55. — Diblaç : 6 h. 7.

Ar pedennou dious ar mintin, ha goude ar pedennou dious ar mintin : Iste cōfessor, en honor da sant Martin, patroun ar Franc

AR MANS : Arru : 8 h. 55.

Er Mans, e vezo chenchet ar wagoniou adarre, hevel m'oa bet great evit mont. Pep hini eta a gemero e blaç hevel diaraog. Goude ma vezo renket an oll, en eur ziblaç e vezo canet : *Cantic Sant-Joseph.*

LAVAL. — *Ar Brevier evit ar veleien.*

ROAZON. — Ter guech : *Regina sine labe concepta, ha goude-ze : Ar chapeled a geuz.*

LAMBALL. — Ter guech : *Parce Domine.*

SANT-BRIEC. — Cantik : *Breuries ar Feiz.*

GUENGAMP. — Ter guech : *Auxilium Christianorum, ora pro nobis. — Ar Brevier evit ar veleien.*

PLOUIGNEAU. — *Ar Magnificat.*

MONTROULES. — *O caloun sacr.*

LANDIVISIAU. — *Ar Memorare.*

LANDERNE. — *Cantik ar Folgoat.*

BREST : 8 heur dious an nos.

Hervez m'az eo bet lavaret, ar belerinet a ia varzu Kemper, a vezo abred aoualac'h evit kemeret e Landerne an hent houarn a ziblaç eno da 8 h. dious an nos.

Ar belerinet a velo dious al levrik-ma, ar pen-
dennou hag ar c'hanticou a vezo canet e doug ar
veach. Pedet int eta d'ho fourchass ha d'ho c'hass
gantho.

Les personnes qui font partie du pèlerinage
auront bien soin de se procurer les cantiques qui
seront chantés durant le pieux voyage. Elles vou-
dront bien s'entendre pour les chanter à la grande
procession qui sera faite à Lourdes. L'heure sera
ultérieurement indiquée par M. le Vicomte de
la Houssaye, directeur du pèlerinage, agréé par
Monseigneur l'Evêque de Quimper et de Léon.

KANTIK

PARDONERIEN KALON JESUS

Ho pet truez ! — Va Doue, hor selaouet
Evit hor bro beuzet enn he daelou ;
Toullet he fenn hag he divrec'h chadennet
He daoulagad e tro ouz ann envou.

DISKAN :

O Kalon Jesus !
Kalon dibab !
Bezit, bezit truezus
Ous hor bro hag ar Pab !

Ho pet truez ! — Va Doue, war ar C'halvar
Ni wel Pie Nao, reneur braz ann Iliz ;
Seul was he boan, seul startoc'h ni a lavar :
Bebet Pie Nao ! ha fin d'he boaniou kriz !

Ho pet truez ! — Va Doue, pa deu Mari,
Mari ho Mamm d'hor bro d'en em ziskouez,
El leac'h ne deuz nemet lann ha guezeri,
Bleuniou ann Env a zavo a nevez.

Ho pet truez ! — Va Doue, ouz dallentez
Kement a bec'h, hep sonjal e reont fall !
D'ezho, hirio, sklerijen ha karantez !
Karantez vraz ! ma vint kristenien all.

Ho pet truez! — Va Doue, gant ho kalon
C'hui glevo mad goulennoù hon hini;
Pa roit ho koad, bemdez, er gommunion,
Petra peffe da nac'h mui ouz omp-ni?

Ho pet truez! — Ho kalon, o va Doue,
A ziskouejat da zantez Mac'harit;
Na feunteun all n'euz bet kavet abaque
Ken puill he gras d'ann dud keiz ha garit.

Ho pet truez! — Va Doue, c'hui lavare :
Pa falvezo da rouantelez Frans
Beva e peoc'h, beva skeduz adarre,
Ne glasko ken feunteun a bareans.

Ho pet truez! — Va Doue, gant he sec'het
Ouz ho kalon hor bro baour a dosta;
D'ar glanvourez skuillit ann dour a iec'het,
Ha pareet ann ene da genta!

Ho pet truez! — Va Doue, ho pet truez!
C'hui oar ervad ez omp ho pugale!
Ouz hoc'h e sent ar maro hag ar vuez,
Hor sikourit, va Jesus, hep dale!

CANTIC ABARS AR GOMMUNION

VAR TON : *Santez Mari.*

Ælez euz ar Barados, admirat an enor
A ra d'eomp er sacramant Jesus hon Redemptor,
Eur vech evit hor prena, eo en em incarnet
Hac evit dont d'hor maga, en em incarn bepred.

Crouer ann Ee hag an douar, var an auter bemdez
Dre goms nerzus ar belec zo crouet a nevez;
An Doue, cals huelloc'h evit ar firmamant,
En em izela dindan spegoù ar sacramant.

An Doue ne chench morse a hed an oll amzer,
An Doue var bal he zorn a zouc ar bed antier,
En em lez facilamant da veza remuet,
Evit disquen e calon ar paoura euz ar bed.

O miracl, ar brillanta euz an oll miraclou!
O burzud incomprenabl d'ar c'haera sperejou!
Evit gounit calonou ho pugale ingrat,
Ho maguit, o va Jesus, gant ho corf hac ho coad!

Nan, evit eur Map unic, ar Vam an den era
Jamæs ne santas quement he c'halon o toma :
Goude quer bras carantez, piou a alfe refus
Consacri he oll galon d'ho caret, va Jesus.

Mar de dister calonou ar Zænt ac an Ælez
Evit caret eun Doue quen leun a garantez,
Penaus e prizit, Salver, dre ar gommunion,
E calonou quer classet etablissa ho tron ?

Penaus credi azeza ous tol sacr eun Doue,
Goude beza outrajet mil guech he vajeste !
D'ho daoulagat, va Zalver, ne allomp presanti
Nemet calonou impur, carguet a lousdoni.

Gouscoude pa gommandit tostet ouz ho panquet,
Dre eur gomz a drugarez effacit hor pec'h et;
Teuzit sclac hor c'halonou dre dan ho carantes,
Neuze ni ho recevo gant laouénidigez.

Pebez consolation ! souden e possedin
Muya caret va c'halon, va guir bried divin :
He ene gant va ene souden a unisso,
Gant va goad he voad santel em memprou a redo.

Prestit d'in o tiouasquel, o va Æl sourcius,
Ma nijin, evel eur goulm, etre divrec'h Jesus ;
Me rô dezan va c'halon, hac en d'in he hini,
Ennan me a reposo tranquil a dizourci.

Ar flam divin a santan em c'halon alumet ;
Devet on gant an dezir da receo va fried...
Hastit pront, o va Jesus, disquennit em ene,
Ha possedit va c'halon hed an eternite.

CANTIC

EN ENOR

AN ITRON SANTES ANNA

Saludomp gant devotion
An Itron Santes Anna :
Leveromp dezi a galon
En he chapelic ama :

DISCAN

Santes Anna, hor Patronez,
Hor sicourit en danjer,
Ha bezit hon Alvocadez
Dirac Jesus hor Salver.

Santes Anna, Mam ar Verc'hez,
A dra zur zo galloudus.
He merc'h en Env zo Rouanez,
Guir Mam d'hor Salver Jesus.
— Santes Anna, etc.

Pep-unan da Santes Anna,
Gant fizians en he boaniou,
A velomp oc'h en em voestla
Hac o vont d'he chapeliou.
— Santes Anna, etc.

Ar vam evit he buguelic,
D'an Itron Santes Anna
A ra bemdez eur bedennic
Hac a zesk deza cana :
— Santes Anna, etc.

Ar soudart o vont d'an arme
D'an Itron Santes Anna
En em erbedo, a neuze
A guerzo en eur gana :
— Santes Anna, etc.

Ma teu an tourmant da c'houeza,
Ar martolot a bedo
He Batronez Santes Anna,
Ha dizoursi a gano :
— Santes Anna, etc.

Al labourer var he dachen,
Evit en em ziskuiza,
Dioc'h he dal a sec'h ar c'houezen,
Hac en em ro da gana :
— Santes Anna, etc.

Ar Pastor e bar menez,
He zenved endro deza,
Lies a veach d'he Batronez,
Oc'h eus clevet o cana :
— Santes Anna, etc.

O vont d'ar mintin d'he zervez,
Ar micherour a bedo
Santes Anna he Batronez,
Ha gant fizians a gano :
— Santes Anna.

E pep korn eus a Vreiz-Izel
An Itron Santes Anna
E deus eun Iliz, eur Chapel;
Deomp-oll di da bardonna.
— Santes Anna, etc.

Evel hon tud coz, Bretonnet,
Henoromp Santes Anna,
Pe'z omp klan, pe'z omp ankeniet,
Ne skuizomp ket o cana :
— Santes Anna, etc. Amen.

KANTIK

PELERINET AR FOLGOAT

Sur l'air du Cantique de la Propagation de la Foi

Euz an Arvor, ar gourre,
Ni deu d'ho saludi;
Oll e zoump ho pugale,
Oll ho karomp, Mari.
Tud ar gourre, Arvoriz,
Diredet oump hirio
Da bedi 'vit an Iliz,
Da bedi 'vit hor bro .

DISKAN

Patronez dous ar Folgoat,
Hor Mam ak hon Itroun,
An dour en hon daoulagat,
Ni ho ped a galoun;
Harpit an Iliz santel !
Avel diroll a ra...
Tenn ak hir eo ar brezel !
Ar peoc'h ! O... Maria.

E Roum ak e kals broïou
Eo goasket an Iliz;
Peur-laeret eo he madou
Gant enebourien kriz.
Hirra ma c'heller guelet,
Er môr euz tarziou guen,
Bagik sant Per zo strinket,
Euz eur garrek d'eben.

Patronez dous, etc.

Perak e lezit ker pell
Pi nao var an douar,
Ma na vell nemet brezel
A reusiou eb ho far ?
Eun dra c'huerdo eo kosa
Pa vever en anken,
Ak ar maro ar c'hrissa
A ve eun aluzen.

Patronez dous, etc.

Mar doc'h mam ar Gristenien,
Ma karit an Iliz,
Eb dale deuit da zifen
Ho pugaligou geiz.
Araok e za ho labour,
Gant bugale Satan...
Mal eo deoc'h dont d'hor sikour.
A d'hon tenna a boan.

Patronez dous, etc.

Diouallit na lavarfe
An dud fall zo er bed ;
« Guechal ez oa Mam Doue
Dous ak eaz da garet ;
E diskouarn a ioa tano,
Klevet a rea raktal :
Hirio ez eo pounner-gleo,
Outhi eo ret krial. »

Patronez dous, etc.

Nann, nann... Oh ! tavit pelloc'h,
Rag Mari, tud difeiz,
Morse na deo bet tomoc'h
He c'haloun en e c'hreiz :
Guelet eo bet o lenva
Var gern ar menezioù.
Bemdez emai o paea
Hon dle dre he dælou.

Patronez dous, etc.

Ar Pastor ak an denved
O dezo eun hean ;
An aour pa vez peur-garzet
A denner eus an tan.
Bremaik Jesus rolo
He dra da bep hini :
D'ar re fall paoniou garo,
Ar peoc'h da dud Mari,

Patronez dous, etc.

Araok mont kuit, o Mari,
Ni ra eur goulenn all.
Nikun n'efe niveri
Oll gouliou Bro-C'hall :
Peleac'h ema he gened,
He nerz, he vaillantis ?
Peguen-izhel eo kouezet
Merc'h hena an Iliz ?

DISKAN

Patronez dous ar Folgoat,
Hor mam ak hon Itroun !
An dour en hon daoulagat
Ni ho ped a galoun.
Ar Frans zo bras he enkres
Mont a rai da netra...
Outi sellit a drues...
Trues !! O... Maria !!

Bras eo bet hor pec'hejou,
Dister hor pinijen ;
Rak-se e dourn an Autrou
E chom ar vialen.
Ret eo gounit hor barner
Pe divoada er pri.
Allaz ! n'ellomp hen ober
Nemet dreizoc'h, Mari.

Patronez dous, etc.

Pell zo c'hui zo bet choazet
Evit hor Rouanez;
E neb bro n'ho peus kavet
Teneroc'h karantez.
Tud fidel a vandennou
A deu d'ho kaout bep bloaz
A var hent ho chapeljou
Ne jom eur ieoten c'hlaez.

Patronez dous, etc.

O tifen guir an Iliz
Euz bet tud eus hor bro;
Pell dious lanneier Breiz
E kaffont ar maro.
Ni n'oump ket tud a vrezel,
Mes rei reomp aluzen;
Hag o vont d'an Tad Santel
Hor guennek zo laouen.

Patronez dous, etc.

Astennit ta ho tivreac'h
Azioc'h ar Frans, ho pro.
Deuit, Guerc'hes, parit enn neac'h
Evel goarek ar glao.
Ar goarek-ze ziskoueze
Ne vije mui dour-beuz,
Hak e tistro grass Doue
D'ar re a ziskouez keuz.

Patronez dous, etc.

Salaun, var skoultr eur vezen
Evit kaout he vara,
Ne lavare ken peden
Nemet : O... Maria !...
Emaomp en Ilis santel
Savet var bez ar foll
Mari ! ni deu d'ho kervel
Mirit na zaimp da goll !

Patronez dous, etc.

MEULEUDI AN ITROUN-VARIA LOURD

Ar c'hleier tro-var-dro,
D'an heur a greisde,
A c'halve tud ar vro,
Da gana : Ave.

DISKAN.

Ave, Ave, Ave Maria.
Ave, Ave, Ave Maria.

Ar plac'hig Bernadett,
A-hed bord ar stæ
Gant he Æl-mad kasset,
A gan a vouez sclær. Ave.

Neuze eun tol avel
Dous ha nerzuz bras
A annons d'ar bugel
E son heur ar c'hras. Ave.

O burzud ! *Massabiel*
A dol sklerijen,
'Vel an heol o sevel
Var bord an draonien. Ave.

Hag eun Intron skeuduz,
Dous he daoulagad,
A zelle truezuz
Euz ar verc'hig vad. Ave.

He zal sklerijennet
Kaer a lugerne,
'Vel ar skeud euz gened
An Otrou Doue. Ave.

He zae a oa guen-kann
'Vel erc'h ar mene,
He gouriz eur ruban
Glas evel an Ee. Ave.

Var he zreid binniget
Oa eur boked-roz
Giz neve-digoret
'Barz ar Barados. Ave.

Ar chapeled gant-hi
En he daouarn glan,
An doare da bedi
'Zesk da beb-unan. Ave.

Eüruz nep d'eus miret
Didach ho ene !
Dezo eo prometet
E velfont Doue. Ave.

Gloria Patri, etc.

II

D'ar gear a zistroas
Ar plac'hig var eon,
Ha d'he mam a gontas
Histor an Intron. Ave.

Eun Intron m'euz gulet
Duze... er menez;
Va mamik paour, me gred
Ez e-hi eur zantez. Ave.

He mam n'he selaoue :
Setu, emez-hi
Konchennou bugale
Diaez da gredi. Ave.

Ker kaer oa, lavare
Ar c'hrouadur kez,
Mar n'hi guelan darre
Ne gavin ket æz. Ave.

D'ar mene burzuduz
Hi c'hass gouskoude
Eun dorn dous ha nerzuz
Evel dorn Doue. Ave.

Petra glaskit ganeomp,
O Intron garet?
Mar plij, lavarit d'eomp
'Vit peoc'h hor speret. Ave.

« Pemzek guez c'hui teuo,
» Eme ar Verc'hez,
» E traon ar meneio
» Da selaou va mouez. Ave.

» Plac'hig pur a galon
» Me rai d'ho ene,
» An eürusdet guirion
» Da velet Doue. » Ave.

O mam karantezuz,
Sellit c'hoaz ouzin;
Deuz ar bed malheüruz
Tec'het a fell din. Ave.

Mad eo n'em gaout dister
Evel bugale :
Hennez eo an hent sklær
Da velet Doue. Ave.

Gloria Patri, etc.

III

Euz ar bobl souezet
Kalz tud e teue
En dro da Vernadett,
Pa darze an de. Ave.

Mæs ar verc'hig choazet
A zav he ene
Gant he zellou nec'het
Etrezek an Ee. Ave.

Deuz ar bed ne zell ken,
Evel pa velfe
Gant guelloc'h sklærigen
An eternite. Ave.

Kaer a oa hi gullet,
A greis he c'halon,
Var greun he chapeled
Pedi he Intron. Ave.

M'ed-hi en he feden,
Pa baras varn-hi
Ar skeud euz sklærigen
Ar Verc'hez Vari. Ave.

Ha kerkent daoulinet,
'Zonj ar bobl fidel,
En eur dremen, gullet
An de eternal. Ave.

Petra zo, va Intron,
Eme Bernadett?
Perak eo ho kalon
Brema glac'haret? Ave.

Petra a halfemp ni
Evidoc'h ober?
Hi respontas : « Pedi
» E vit ar pec'her. Ave.

» Ama garfen gullet
» Proceisonou,
» Gant pere vo klevet
» Kan ar c'hantikou. Ave.

» Hag eur chapel savet
» Var lein ar gres'hen,
» A rai ma vo brudet
» Va flas da viken. » Ave.

Gloria Patri, etc.

IV

Mont reas Bernadett
Diou vech d'ar menez :
Diou vech netra ebet
Ne velas, paour-kez. Ave.

O Intron, o Mam vad,
Grit c'hoaz ar burzud
Ma beano timad,
Goaperez an dud. Ave.

Mar m'eus ho c'hoffanset,
Me c'houlén iskuz :
Pardonit, me ho ped,
Mam madelezuz. Ave.

Allas ! ne zonje ket,
Penos an anken,
A dreuz hon eürusted
'Vel eur goumoulen. Ave.

Ar goumoulen tenval.
Pront a dremenas :
E-giz ar guezhou-all
An Heol a baras. Ave.

Mar teuit euz an Envou,
O joa va c'halon,
Diskuezit ho krasou,
Mar plij, va Intron. Ave.

Eur merk a c'houlennet
Gant ho madelez,
'Vit ma vo gullet sklær
E z'oc'h Rouanez. Ave.

E-harz ho treid ra teui,
Var ar rozen-goue,
Brema da zigori
Eur boked neve. Ave.

Neuze n'eur vouse'hoarzin
Evel an Alez :
« Guelloc'h, eme-hi, a rin,
» Pa z-oun Rouanez. Ave.

» N'eur zigori, peurvuia,
» A varv ar rozen ;
» Kalon ar vam guella
» Zo guelloc'h'soursen. » Ave.

Gloria Patri, etc.

V

« It brema d'ar feunteun
» Aze... emez-hi...
» Redek a raio leun
» 'Vit meur a hini. » Ave.

Ha Bernadett neuze
Vont d'ar stæz gant prez.
« Va merc'h, n'eo ket aze, »
Eme ar Verc'hez. Ave.

Ar plac'h pa zistroas,
D'al lec'h oe merket,
En he daouarn zantas
An douar glebet. Ave.

O tachen leun a joa !
Piou hiviziken
No garfe ket tanva
Dour mad ho Soursen? Ave.

Na c'hui, o Intron gaër,
Diskuezit ho krasou,
Pe hano ho c'hanver
E bro an Alez? Ave.

Ken p'o hen diskleriet
D'o servicherez,
Me jomo daoulinet
Dirazoc'h, Mæstrez. Ave.

Pedir guez c'houlennas
He hano gant-hi,
Ha d'an Intron blijas
Selaou anez-hi. Ave.

Da zavez ar gouel bras
Euz salud an Ael
Betek Mari leas
Ar c'han solanel : Ave.

'Vel an heol o kuzet,
A baras neuze :
He hano lavaret
E pignas d'an Ee. Ave.

« Hanvet oun, lavaras,
» Conception-Pur,
» Abaoue am c'hrouas
» Doue krouadur. » Ave.

Gloria Patri, etc.

VI

Setu e komzou berr		« Hanvet oun, lavaras,	
Ar burzud hanet		» <i>Conception-Pur</i> ,	
N'eus ket c'hoaz pell-amzer		» Abaoue am c'hrouas	
E Lourd zo c'hoarvezet. Ave.		» Doue krouadur. »	
C'hoarvezet da vil-eis-kant		Gouskoud Bernadett,	
<i>Hanter-kant ha eiz,</i>		Test euz ar burzud,	
'Vit roi ententamant		Keit all ne zonje ket	
D'an oll dud a feiz. Ave.		Vize eet ar brud. Ave.	
Nep zo guirion bepret,		A vize deuet brud	
Var gador sant Per,		<i>He Intron</i> zantel	
En Envou n'eus guelet		Keit etouez an dud,	
Oa sinet he c'her. Ave.		Betek Breiz-Izel. Ave.	
Goud' ar pec'het kenta,		Ni ho salud, Soursen	
Madelez Doue		Ar guir garante,	
Reas ar bromessa		A vrema da viken	
Eur Vaouez teuje. Ave.		Redit noz ha de. Ave.	
E teuje eur Vaouez		Euruz nep a viro	
Trec'h d'an drouk-speret,		Dibec'h he ene!	
Arog genel memez		An heur vad hen devo	
Divlam a bec'het. Ave.		Da velet Doue. Ave.	
		<i>Gloria Patri, etc.</i>	